

Urzh an Erminig

Urzh an Erminig krouet e 1381 a zo unan eus koshañ urzhioù brezel hag enor en Europa.

E 1344 e krou Edouarzh III a Vro-Saoz urzh « Marc'hegerien Sant Jord », ha goude-se hini ar Gabestrell e 1348. Yann II, e Bro-C'hall a grou e 1351 Urzh ar Steredenn. E 1430, eo hini ar C'hreñ aour gant dug Bourgogn ha damc'houde hini ar Greskenn gant Reun Añjev e 1448.

Yann V, dug Breizh, en deus bet c'hoant dre sevel urzh an Erminig da ziskouez pouez an dugiezh war an noblañs hag ar youl da vezañ unanet tro-dro dezhañ.

Degemeret e vez merc'hed ha partabled en Urzh. Ar varc'hegez kentañ eo Janed Navarra hag an eil Janed Albret, kontez Richmond hag e 1447 Izabel Skos, dugez Breizh.

Evel an holl urzhioù marc'hegiezh eo bet berzet Urzh an Erminig gant reveulzi Bro-C'hall hag ar c'holier diwezhañ a oa war bez Yann IV e iliz-veur Naoned a zo bet distrujet.

Distro an Erminig

EE 1972, ar senedour Georges Lombard a gemeras lec'h René Pleven e penn ar C'elib hag evit trugarekaat anezhañ en anv Breizh a-bezh en deus bet ar soñj da adkemer enoradenn an dug Yann IV. Ar pal ne oa ket adsevel un « urzh » kozh met kentoc'h kaout un arouez hengounel bev. Roet e voe ar c'holier da René Pleven d'an 29 a viz Gwengolo 1972.



E 1988 e kemeras Skol Uhel ar Vro plas ar C'elib evit trugarekaat tud -merc'hed ha paotred- o doa, dre o obererezh hag o engouestl, graet enor da Vreizh.

Norbert Métairie

Maer An Oriant
Prezidant Lorient Agglomération

Guy Gestin et Lisardo Lombardia

Kadoriad ha rener Emvod ar Gelted

Patrick Malrieu,

Prezidant Skol-Uhel ar Vro

a zo laouen ouzh ho pediñ da

Lid Kolier an Erminig

d'ar Sadorn 11 a viz Eost 2018 da 15e
e Club K Stad ar Vouster

straed Pierre Guergadic
56100 An Oriant

Roll-devezh

15e : Degemer

15.30e : **lid Kolier an Erminig**

Gwyn GRIFFITHS

Yann TALBOT

Herve ar BEG

Jorj CADOUAL

ha roet **medalenn Skol-Uhel ar Vro** da :

Poellgor Nominoe

Kounlec'h Baen-Ballon

Anne ha Fañch ar Moal disklêriet « liorz dibar »

gant an International Camellia Society

10^{vet} Redadeg

Rouedad staliou kan

19e : Koktel

Digor eo an abadenn d'an holl, evit bezañ sur da gaout ur plas, roit hoc'h anv a-raok ar 1^{añ} a viz Eost, da

icb@skoluhelavro.bzh

pe dre lizher da Skol Uhel ar Vro :

Ti ar Vro -3, straed al Lezenn -56000 Gwened

02 97 68 31 10



Pedadenn da

Lid Kolier an Erminig

Sadorn 11 a viz Eost 2018

e Club K Stad ar Vouster


straed Pierre Guergadic

56100 An Oriant



SKOL-UHEL AR VRO
INSTITUT CULTUREL
DE BRETAGNE

Gwyn Griffiths (Kembre, 1939-2018)



Un ambasador eus ar c'hentañ evit Breizh e oa Gwyn Griffiths, hag un den barrek war sevenadur hor bro (he yezh, hec'h istor, he lennegezh, he sonerezh, he foblañs...). Ken alies e oa deuet da Vreizh (un daou-ugent gwech bennak), ken ma oa gwelloc'h e anaoudegezh eus ar vro eget hini kalz Breizhiz !

Kembraeger a-vihanik e oa hag a-druga-rez d'e vicher a gelaouenner en deze tro da skrivañ kalzik pennadoù e kelaouennoù a bep seurt hag ivez evit BBC Cymru.

Gant se ez eo fonnus e levrennadur, enañ skridoù diwar-benn Breizh ha Kembre. Dileuriad a-berzh Kembre e oa evit Kengor etrebroadel evit difenn ar brezhoneg (an ICDBL, a oa bet erminiget e sekretourez Lois Kuter e 1995). Kas a rae ivez ingal pennadoù (57 anezho abaoe 2008) d'an ABP, Agence Bretagne Presse, renet gant Philippe Argouarc'h, bet enoret gant Urzh an Erminig ivez.

Diaes eo menegiñ amañ an holl draoù en deus bet graet e Breizh hag evit Breizh : diskouezadegoù, krouidigezh ti ar Joniged ha levrioù diwar-benn an danvez-se, un antologiezh lennegezh Breizh, The Turn of the Ermine, e 2006, gevelliñ Trigneg gant Pontypridd ha meur a dra all c'hoazh.

Herve ar Beg (Kemper, 1951)



Bet ganet e bed ar brezhoneg en deus Herve ar Beg difennet ha kaset war-raok ar stourm evit ar yezh war meur a dachenn : kelenner a youl vat pa oa krennard, hag er skol-veur diwezhatoc'h. Er bloavezhioù 70 e kemeras perzh er stourm evit krouidigezh an aotreegezh hag an deug brezhoneg. Lezel a reas e vicher a gelenner saozneg a-gostez evit en em ouestlañ d'ar brezhoneg en ur labourat evit ar gelaouenn Evit ar brezhoneg e 1976, a youl vat da gentañ hag evel implijad goude-se. War an dachenn bolitikel e stourmas ivez, evit ma vefe doujet d'ar gwirioù diazez en ur vro a embann ez eo hini Gwirioù Mab-den (harpañ prizonidi an FLB e 1981, krouiñ ha kemer perzh er strollad Emgann etre 1982 ha 2000). Ne voe ket komprenet atav e livadurioù ken brav war ar panelloù-hent, na kennebeut pegen a-bouez e oa ar stourm-se !

Kenderc'hel a reas gant ar stourm evit kaout skingomzioù dizalc'h (Radio Kreiz Breizh etre 1984 ha 2000 hag Arvorig FM goude-se etre 2003 ha 2018).

Dre ma'z eo ar sevenadur un danvez liesseurt e kemeras perzh Herve er vuhez sevenadurel lec'hel (krouidigezh Digor, Kreizenn sevenadurel vrezhon Gwengamp, ma voe he frezidant e-pad ugent vloaz) hag en ensavadurioù an Emsav, evel Kuzul Sevenadurel Breizh, diwanet diwar Garta sevenadurel 1978, ha Kevre Breizh. Ur vuhez a-bezh gouestlet d'ar brezhoneg !

Yann Talbot (Lannuon1940-2018)



A orin eus Lannuon, desket brezhoneg gantañ, en deus stourmet a-hed e vuhez evit e yezh hag evit e vro. Beleget e voe e 1974 hag e-pad bloavezhioù e kelennas istor, douaroniezh ha brezhoneg e Skol Itron-Varia Kompostal e Rostrenenn. Anavezout a rae mat-tre ar broioù keltiek ha kalz a stajoù a voe aozet gantañ er broioù-se evit ar re yaouank. E anaoudegezh eus ar yezhoù a roe an tu dezhañ da brezeg e kembraeg hag en alamaneg ivez. Skrivet en deus barzhonegoù, pennadoù niverus, troet skrivagnerien vrudet evel Kafka (An treuzstummadur), homeliannoù, rentet enor da Anjela Duval, da Bêr Bourdellez, kemeret perzh e abadennoù skingomz diwar-benn sent Breizh (war radio Clarté... Krouet en deus Breuriezh Sant Erwan, kannadig beleien Breizh, ha kadoriad Kuzul ar Brezhoneg eo bet. Betek e varv e oa ezel eus burev ar C'hendalc'h Keltiek Etrebroadel. E bennadoù zo bet embannet er c'helaouennoù Al Liamm, Al Lanv hag Imbourc'h.

« Amañ e Breizh e c'hallv an Iliz da stourm evit reiñ da holl bobloù an douar o gwirioù, ober evit ma vo dieubet an dud wasket, labourat evit ma chomo naet ha glan hon douaroù, hon morioù, hon endro, krouiñ traoù nevez ha kaer en hon yezhoù ha sevenadurioù... »

Jorj Cadoudal (Magoar, 1929)



N'eur ket evit tremen hep anavezout Jorj Cadoudal e bed ar sonerezh goude ar brezel ! War roud e ontr (ar barzh « Kadour ») eo bet hag asambles gant Job Noël e krouas Kevrenn Rostrenenn e 1946, Kelc'h Boulvriag e 1949 ha bagad Boulvriag e 1953... Gantañ ha gant e gomper Etienne Rivoallan ez ae ar maout ingal e kenstrivadegoù ar sonerien e Gourin, hag o skolidi a zeuas da vezañ anavezet ivez evel Daniel Philippe, ar soner aet gantañ ar muiañ a ditloù soner e kampionadoù Breizh.

Sonet en deus war meur a bladenn a zo anavezet mat hiziv c'hoazh (Eured Glenmor, pe

pladenn en enor da Étienne Rivoallan). Evel-just e kemeras perzh en adlañsañ ar festoù-nnoz er bloavezhioù 56-60 hag e lakaas Klaodina Mazeas e darempred gant sonerien hengounel a voe enrollet ganti da c'houde (evel an itron Bertrand, kannerez hep he far). Liesseurt eo e stourm, difenn a ra ivez al labour-douar, ar stourmoù ekologel (krouiñ ar gevredigezh Bevañ e Menez Are), ar vuhez lec'hel (stourm evit ma chomo an ospital e Karaez...).

Ha pa zeuas ar mare da vont war e leve, e oa leun kouch e implij amzer : festoù-nnoz gant Re an Are, manifestadegoù evit adunvaniñ Breizh, evit ar brezhoneg, evit harpañ stourmoù etrebroadel...

An Erminiged a-vremañ

E 1972 e Pondi
René PLEVEN †
E 1973 e Roma ha Roazhon
Gabriele PESCATORE †
Jean MEVELLEC †
E 1988 e Roazhon
Vefa de BELLAING †
Pierre-Roland GIOT †
Polig MONJARRET †
Henri QUEFFELEC †
E 1989 e Naoned
Bernard de PARADES †
Marivon JAOUEN †
Per DENEZ †
Louis LICHOU †
E 1990 en Alre
Charles LE GALL †
Chanig LE GALL †
E. LE SCANV (GLENMOR) †
Joseph MARTRAY †
Albert TREVIDIC †
E 1991 e Kemper
Georges LOMBARD †
Robert LEGRAND †
Pierre LAURENT †
Pierre-Jakez HELIAS †
E 1992 e Sant-Maloù
Michel PHILIPPONNEAU †
Ronan HUON †
Yvonne JEAN-HAFFEN †
Jordi PUJOL
E 1993 e Dinan
Leanez Anna-Vari ARZUR †
Herry CAOUISSIN †
Yann POILVET †
Jean TRICOIRE †
E 1994 e Gwened
Ivetig an DRED-KERVELLA †
Pierre LEMOINE
Yvonig GICQUEL †
Alan STIVELL
E 1995 e Gwenrann
Jacques BRIARD †
Loeiz ROPARS †
Jean FREOUR †
Ivona MARTIN †
Lois KUTER
E 1996 e Pont 'n Abad
Pierre LE TREUT †
Rita MORGAN WILLIAMS
Joseph LEC'HVIEN †
André LAVANANT
E 1997 e Kintin
Jean-Jacques HENAFF

Jean L'HELGOUACH †
Dodik JEGOU
Raymond LEBOSSE †
E 1998 e Gwitrég
Goulc'han KERVELLA
Henri MAHO †
Pierre LOQUET
Naïg ROZMOR †
E 1999 e Naoned
Jean-Bernard VIGHETTI
Riwanon KERVELLA
Patrick MALRIEU
Denise DELOUCHE
E 2000 e Pondi
Tereza DESBORDES
Lena LOUARN
René VAUTIER †
Pierre-Yves LE RHUN
E 2001 e Landerne
Pierre TOULHOAT †
Rozenn MILIN
Breur Marc SIMON
Dan ar BRAZ
E 2002 e Lannuon
Henri LECUYER †
Yves ROCHER †
Michael JONES
Robert OMNES †
E 2003 e Sant-Maloù
Jean-Louis LATOUR †
Gilles SERVAT
Angèle JACQ
René ABJEAN
E 2004 e Kastell-Briant
Albert POULAIN †
Yannig BARON
Marie KERMAREC
Yann GOASDOUE
Pierre-Yves MOIGN †
E 2005 e Loktudi
Jean OLLIVRO
Ewa WALISZEWSKA
Pierre LE PADELLEC
Jean KERHERVE
E 2006 e Plañvour
Jean-Pierre VINCENT
Claudine MAZÉAS
Xavier LECLERCQ
Claude STERCKX
E 2007 e Sant-Brieg
Rhisiart HINCKES
Martial PEZENNEC †
Job an IRIEN
F. LE QUEMENER †

E 2008 e Roazhon
Roger ABJEAN †
Gweltaz ar FUR
Y. BREILLY-LE CALVEZ
Viviane HELIAS
E 2009 e Ankiniz
J.-Christophe CASSARD †
Tugdual KALVEZ
Yann-Fanch KEMENER
Jean-Guy Le FLOC'H
Mona OZOUF
E 2010 en Oriant
Catherine LATOUR
Annaig RENAULT †
André CHEDEVILLE †
Donatien LAURENT
E 2011 e Kemper
Andrea ar GOUILH
Yann CHOUCQ
Joseph Le BIHAN
André POCHON
E 2012 e Gwengamp
Yves LAINE
Albert BOCHER †
Ivonig Le MERDY
Frères MORVAN
E 2013, St-Nikolaz-an-Hent
Jean-Jacques MONNIER
Yves-Pascal CASTEL
Martial MÉNARD †
Tangi LOUARN
E 2014 e Naoned
Philippe ABJEAN
N. et F. LE GARREC
Jacqueline LE GUEN
Erwan VALLERIE
E 2015 e Gwened
Philippe ARGOUARC'H
Patrick MARESCHAL
Yvon PALAMOUR
Eugène RIGUIDEL
E 2016 e Karaez
Nolwenn KORBELL
Jean CEVAER
Yann-Fañch JACQ
Mikael BODLORE-PENLAEZ
E 2017, St-Ke-Porz-Olued
Mari RIOUAL
Loeiz ELEGOT
Alan an NOAC'H
Joel AUVIN (NONO)